

Extrait du Ai 'ta!

<http://ai.ta.free.fr/spip>

2009-11-07 : Disoc'hoù ar votadeg foran (Ai'ta! Breizh)

- Ai 'ta! - Stourmoù - Brezhoneg en tier-post! -

E BREZHONEG !

Date de mise en ligne : d'ar sadorn 7 a viz Du 2009

Ai 'ta!

D'ar 7 a viz Du zo bet staliet boestou-votiñ dirak dek ti-post e Breizh (Lannuon, Bear, Plouared, Gwengamp, Pondi, An Alre, Gwened, An Oriant, Brest, Lesneven) gant Ai'ta. Ar strollad evit difenn ha kas war-raok ar brezhoneg en deus kinniget d'an dud respont d'ar goulenn-mañ :

"Daoust ha mat eo deoc'h e vefe divyezhek brezhoneg-galleg an tier-post publik o statud ?"

791 den o deus kemeret perzh er votadeg-se.

An disoc'h a diskouel splann eo tomm an dud deus ar brezhoneg, rak **95% anezhe o deus respontet "Ya"**. Kement-se a roio nerzh da izili Ai'ta ! da genderc'hel gant o stourm evit ma vefe gwelet ha klevet ar brezhoneg en tier-post hag en holl al lec'hioù foran.

Bear 49 den o deus votet 48 den o deus respontet ya! 0 den o deus respontet n'ouzon ket! 1 den o deus respontet nann!

Lesneven 33 den o deus votet 25 den o deus respontet ya! 4 den o deus respontet n'ouzon ket! 4 den o deus respontet nann!

Plouared 38 den o deus votet 37 den o deus respontet ya! 1 den o deus respontet n'ouzon ket! 0 den o deus respontet nann!

Lannuon 84 den o deus votet 81 den o deus respontet ya! 0 den o deus respontet n'ouzon ket! 3 den o deus respontet nann!

Gwengamp 90 den o deus votet 82 den o deus respontet ya! 4 den o deus respontet n'ouzon ket! 4 den o deus respontet nann!

Brest 89 den o deus votet 88 den o deus respontet ya! 0 den o deus respontet n'ouzon ket! 1 den o deus respontet nann!

Pondi 114 den o deus votet 105 den o deus respontet ya! 8 den o deus respontet n'ouzon ket! 1 den o deus respontet nann!

An Oriant 135 den o deus votet 131 den o deus respontet ya! 1 den o deus respontet n'ouzon ket! 3 den o deus respontet nann!

An Alre 39 den o deus votet 38 den o deus respontet ya! 1 den o deus respontet n'ouzon ket! 0 den o deus respontet nann!

Gwened 120 den o deus votet 115 den o deus respontet ya! 0 den o deus respontet n'ouzon ket! 5 den o deus respontet nann!

En Holl:

791 den o deus votet

750 den o deus respontet ya! 94,8%

19 den o deus respontet n'ouzon ket! 2,8%

22 den o deus respontet nann! 2,4%

France Bleu breizh Izel :

http://jt.france3.fr/regions/popup.php?id=l29a_locale&video_number=0

Pennad ur studierez war ar c'hazetennerzh :

<http://ceciestunexercice.wordpress.com/2009/11/07/le-breton-cest-tendance/>

Ouest-France Lannuon :

http://www.ouest-france.fr/actu/actuLocale_-Bilinguisme-dans-les-services-publics-Oui-a-95-_22113-avd-2009

Bremaik :

http://bremaik.free.fr/sizhun/sizhuniou_2004/sizhun46_2009.html

Da c'hoût memes tra : **paotred Mari-Robin Lesneven** 'oa bet o klask jeu deus an ezel a oa o terc'hel ar burev dirak an ti-post. Goulet 'oa bet gantañ reiñ e idantelezh. An ezel 'neva nac'het o lâret re rae ket a zrouk da den ebet dirak an ti-post. Hag ar flied da lâret dezhañ oa "Trouble à l'ordre public", hag ober trouz dezhañ : ma ne roje ket e idantelezh e vije bet lakeet menotoù dezhañ ha kaset dre-nerzh d'an acherdi…

Na brav an doare…

E BREZHONEG !